

Rene ar Barz. Euz Landreger. Ger ebed diwar e benn el leoriou lennegez. Bet skrivet e fin an XIX^{ved} kantved.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Ober a ra aliez a-walh gand geriou galleg. Dre vraz ne ra ket ar hemmadur D/Z, nemed gwechou 'zo. Levezonet eo gand ereadurez ar galleg.

Chañson war sujed An ostiz liper

War don : Ar filouter fin.

Me ho ped, etrezoh, Bretoned, tostait amañ, erruet
Ha me a raio va oll bosupl evid resitañ
Ar fars plezant 'zo erruet, egzempl eo er vrao,
Erruet er bloavez prezant er barrouz Kenavo.

Goud a rit, pep hini ahanoh, n'eo ket permetet,
Denommi anoiou an dud en chañson ebed,
Me ho lez da zoñjal da biou ez eo kompozet :
An hini a zant kaoud gal, 'hell'n em grafigned.

Me a gomz demeuz eun ostiz a gare liped
En kement skodenn 've 'n e di e veg ve fouret,
Goud a ouie konta d'an dud flibez ha flabez¹,
Evel-se dape bananhou en e blijadurez.

Pa 'nije servijet an dud er zal da eva,
Eñ a lere eur fars bennag d'o divertisa,
Ar bambocher a oa kontant euz a gement-se,
Hag a lavare d'an ostiz : « Azezit da eva eur banne ».

An ostiz a oa eul liper, 'vel m'am-eus laret,
Hag azeza gante ouz taol, se 'oa e zouhet,
Prezanti a ra e werenn deze hebdale :
« D'ho yehed, ma zud, emezañ, evom eur banne ».

Kement boutaillad a deu raktal 'vez paeet,
An ostiz a dastum² arhant hag a ev bepred,
Eur vicher demeuz ar vrava, se a zo plezant,
Eva gwin demeuz e gao hag ouspenn touch arhant.

Ar re-mañ 'oa tri den yaouank, mibien deuz a di,

¹ flibez ha flabez : flabaj.

² a dastum : ne ra ket ar hemmadur D/Z (Tregerieg)

'Oa eet d'en em divertisa d'an ostaleri,
Kait ha ma pad o arhant ez int bet servijet,
Beteg nav eur euz an noz o yalh a zo padet.

Pa oa dispignet o arhant, o-deus lavaret
D'an ostiz rei deze *en crédit* c'hoaz eur voutailed³.
An ostiz a lavar deze : « Poent eo finisa,
Avañset eo an noz, it d'ar gêr da loja ».

Unan euz an tri den yaouank en-eus lavaret :
« Petra, emezañ, ma ostiz, leret ha soñjet⁴,
Abaoe eiz eur dezu ar mintin c'hwi a zo regalet ;
Mar doh den brao, paeit bremañ dim eur voutailed ».

Raktal m'o-deus laret d'an ostiz paea boutailed
En eur goler⁵ deuz ar vrasa eñ a zo antreet :
« It er-mêz ma zi, emezañ, partiit raktal,
Rag me n'on ket desidet da rei deoh regal ».

An eil a lere d'egile pa 'oant eet er-mêz :
« Bemdez 'oar o teski skiant, kamaraded kêz,
Goude beza greet onestiz ha kalz dispignet
Pa eo bet lipet on arhant, er-mêz 'z om taolet ».

Unan euz an tri den yaouank e-neus c'hoaz lavaret :
« Tapet brao om gand an ostiz a welet⁶,
Me a bromet deoh, war va ger, ha m'hen lavar sklêr,
Me a zizono an ostiz da veza liper.

Me ho ped, va hamaraded, disul ar beure,
Da zoned da di al liper da eva eur banne,
Ha prest goude me 'erruo en eur gariolenn
Dre ma ne houlennan ket beza anavezet gand den ».

E daou gamarad a-neum gav d'ar zul ar beure,
Hag int o lared d'al liper : « Roit dim eur banne,
Ni a baeo deoh en avañs, amañ ho poezon,
Hag evit ganim eur bannah, kanit dim eur zon ».

An ostiz a oa gwell-gontant ha rejouiset
Pa 'n-eus gwelet e oa kelou adarre da liper,
Mez ma 'nije bet gouvezet 'oa 'vid e domaj

³ eur voutailed : eur voutailad (evid ar rim).

⁴ leret ha soñjet : larir ha soñjit.

⁵ eur goler : galleg. En imor.

⁶ a welet ; a welit.

E-nije bet o zervijet ha lezet e lipaj.

Setu erru or hamarad en eur gariolenn
Heb beza bet 'eneb feson anavezet gand den.
Diskenn a ra en ti al liper, lojeiz a houlenn ;
« Lakit, emezañ, 'n ho remis va hariolenn.

Lakit va marh er marchosi ha roit dezañ boued,
Ha bezit bepred dizoursi, paeet sur e vefet,
Kerhit euz ma hariolenn din ma valijenn
Ma roin arhant deoh da gleñka en prezañs daou den.

Dre ne hallan ket partial deuz ahann fete',
C'hwi a zastumo va arhant din en surete,
Kontit ane ervad, ostiz, daou-hant skoed a zo,
Ha pa 'mezo ezomm, ganeoh me a houlennno. »

An ostiz a gont an arhant. « Ya, emezañ,
Daou-hant skoed a zo aneze, evel a welan,
Aotrou, me ho ped, da veza dizoursi a ze,
Me o lakaio 'barz em pres deoh en surete. »

An hini 'oa sañset aotrou e-neus lavaret :
« Kerhit din eur bannah, me am-eus sehed,
Goude c'hwi a gleñko va arhant en ho kontouer,
N'em-mo ket ezomm aneze ken a vo emberr. »

An ostiz a oa eul liper, an oll 'oar er vro,
Mez a-hend-all e oa onest en e oll goñcho',
N'e-nevoa ket disfiziañs ezu a zen ebed.
Se 'ra dezañ er momant-se beza bet tapet.

Keit ha ma oa eet en ostiz d'ar hao david gwin,
An aotrou 'n-eus bet amzer da ober e dro fin.
An daou-hant skoed en-deus bountet en e hodellou
Ha laket 'barz er valijenn mein en o flasou.

Pa erruas an ostiz gand ar gwin er zal,
An aotrou a bed anezañ da vond raktal,
Da gas e valijenn d'e bres ha retorn goude
'Vid m'o-defjont⁷ ar blijadur da eva eur banne.

⁷ m'o-defjont : m'o-dije.

Pa 'n-eus alhwezet war ar valijenn
D'ar zal 'z eo retornet, joauz 'vel peb den,
An aotrou a lavar dezañ : « Evom eur banne,
Ha kanit dem eur ganaouenn war eun ton neve' ».

E daou gamarad a lavar : « Poent eo finisa
Rag warhoaz ar beure, aotrou, ni a deuiio ama' ;
Warhoaz ni a gemero amzer d'en em eksplika
War ar pezh on-deus kavet amañ er beure-ma' ».

An deiz war-lerh, deuz ar beure, 'h erru an daou den,
Ma houlennjont gand an ostiz hag e oa moyen
Da gomz gand an aotrou pehini 'oa 'n e di lojet :
« Larit dezañ 'h om erru ha ni gwall-breset ».

An ostiz a lavar d'an aotrou : « Daou den 'zo amañ
Hag a ziskouez beza preset, hervez a welan ;
An daou den a oa amañ ganeoh deh, aotrou,
O-deus c'hoant da barlant ouzoh evid aferiou ».

Pa erruas an aotrou er zal e oe saludet :
« Boñjour, emeze, deoh, aotrou, ha c'hwi yah bepred ».
« Brao-braz on, eme an aotrou, yah, evel pep hini,
Degasit dim bremañ, ostiz, friko d'on dijuni ».

An ostiz a zegas deze ha kig ha bara,
Hag ivez boeson da eva, ne vanke ket netra.
An aotrou a lar d'an ostiz : « It bremañ 'n ho tro,
Ha lest⁸ ahanom amañ sioul 'vid on afero' ».

Eun hanter eur vad da houde o-deveus skoet,
An ostiz a houl digante : « Petra souetet⁹ ? »
An aotrou a lavar dezañ : « Degasit brema'
Ma valijenn din ma 'mezo arhant d'ho paea ».

An ostiz a redas d'e bres, ya, hebdale,
Degas 'ra gantañ ar valijenn hag e' bepred ge ;
An aotrou a lavar dezañ : Kontit, me ho ped,
Goud a ouzoh 'oa aneze en Frañs daou-hant skoed ».

Pa 'n-eus digoret an ostiz ar valijenn-ma'
Ne gavas 'barz en enni nemed mein da gonta/
Ma 'n em gav en braz estonet, ha ma lar d'an aotrou :

⁸ lest : lezit.

⁹ souetet : souetit.

« Unan bennag a rank beza c'hoariet din an dro ».

An aotrou ah a en koler, dezañ e lavar :

« Te, 'mezañ, a zo eur filout¹⁰, hag unan heb e bar.
Mad e oa din kaved testou (me da wel'd ouz ar groug),
Paneved-se 'oen tremenet ganit 'vid eur filout¹¹ ».

An aotrou a zavas e vouez hag a lavar dezañ :

« Te, 'mezañ, 'zo eur fripon, eul laer, war a welan.
Me a ya da gaved ar Juj 'vid ma vi puniset.
An dud-mañ 'oar 'm-oa roet dit-te daou-hant skoed ».

An ostiz a lavar d'an aotrou : « Me ho ped,

Na dekriit ket ma zi, me a zo tapet.
Eur wech all me 'vo furroh, din eo eun egzempl,
Ne dastumin ken 'barz em pres mein en pals arhant.

Roet ho-poa din da gleñka deh ho taou-hant skoed,
Me 'm-oa o hontet ma-unan, hag em pres alhwezet ;
Me 'rento deoh ho taou-hant skoed, netra justoh 'vid-se,
Ar holl a viran evidon, teom¹² oll gand-se. »

Ar chañson-mañ 'zo eun egzempl d'an oll en añtier,
Kengkoulz eo evid an ostiz 'vel 'vid ar bambocher ;
Ar bambocher pa 'n-eus arhant a vez servijet
Ha pa vez seh e hodell, er-mêz e vez taolet.

D'an ostizien ez eo egzempl koulz ha da re all
Rag aliez e vez afer gand tud meurbed fall,
Hemañ 'zo bet tapet, se a zo plezant,
Kemer mein gand eur filout 'barz en plas arhant.

¹⁰ filout : filouter.

¹¹ eur filout : ne rim ket.

¹² teom : ? Marteze : touom.